


Kantik Sant Salaun



Ton anevezet

DISKAN

O sant Salaun, o sant patron,
Ho pedi reomp a greiz kalon :
Roit ho pennoz d'an dud fidel
A zo diredet d'ho chapel.

I

Saet var an tron dre eun torled,
C'houi a ouelas kalz d'ho pec'hed...
Brevit ivez hor c'halonou
Gant eur guir geuz d'hor pec'hejou.

II

Roue dispont kreiz ar brezel
C'houi'zifennas hor Breiz-Izel...
Dre ho peden, en han' Doue,
Difennit breman hon ene.

III

C'houi viras ouz al laeron-vor
Da lakat freuz en hon Arvor...
Herio mirit ouz tud dileiz
Da zont a benn ouz kizion Breiz.

IV

D'an ilizou, gant largentez
C'houi a roaz euz ho tanvez...
Deskit ato da bep kristen
Dever ken dous an aluzen.

V

Skuiz o ren ho rouantelez
C'houi a glaskas ober dilez...
Grit ma vezimp, e kreiz ar bed,
Humbl a galon hag a spered.

VI

C'houi a glaskas an eurusted
Et leac'h 'm éma, dreist ar stered.
Grit ma klaskimp, ha deiz ha noz
Dreist peb tra, gloar ar baradoz.

VII

Eun deiz erlin, 'vit hor Zalver
C'houi a varvas 'vel eur merzer...
Eun deiz ivez ni a varvo,
Grit ma nijimp d'an Env hor bro.

Permis d'imprimer :

P. JONCOUR, V. g.

Pardon Sant-Salaun, e parrez Plouye, e vez bep bloaz, da zul ha da lun ar Pentecost.